

KELAOUENN NANN OFISIEL REPUBLIK BRO C'HALL

=====

*Dekred evit ur C'harzh d'an distruj
n° [2026-0701] ar 1^{añ} a viz Gouere 2026*

a-zivout ur strategiezh vroadel evit merañ war hir dermen hag adc'hounid ar girzhier

Ar c'hevredigezhioù a warez an natur hag an endro,

*Dre m'o deus kemeret perzh er studiadenn kenurzhiet gant Prefedoù an departamantoù evit
krouiñ ur reol nemetken, a-benn simplaat hag unvaniñ ar reolennoù melestradurel a ro aotre da
ziskar girzhier ;*

Hag hervez ar vonreizh ;

Hervez kod ar maezioù hag ar pesketaerezh mor ;

Hervez kod an endro ;

*Hervez lezenn stur niv. 2025-268 ar 24 a viz Meurzh 2025 a-zivout an emrennerezh-boued hag adnevezadur
ar remziadoù labourerien-douar ;*

Dre ma 'z eo a-bouez bras deomp e vefe miret hag adsavet ar garzhaouegoù ;

Dre ma 'z eo mallus bras gwareziñ an endro (hin, dour, bevliesseurtes, hag all ...) ;

A zekred :

**Rann 1añ : Strategiezh vroadel evit merañ war hir dermen hag adc'hounid ar
girzhier**

Pennad 1añ

Ar strategiezh vroadel evit merañ war hir dermen hag adc'hounid ar girzhier a ziskouez
penaos gwareziñ, adsevel, krouiñ ha merañ, en un doare padus, ar
garzhaouegoù war an dachenn vroadel a-bezh.

He falioù a zo ar re-mañ :

- 1- Gwareziñ perzhioù ekologel ar girzhier kement hag o zalvoudegezh evit al labour-douar, an dour hag ar gweledva ;
- 2- Sikour da vac'hañ ar c'harbon ha d'en em azasaat da cheñchamant an hin ;
- 3- Harpañ ar vevliesseurtes ha gwareziñ an douaroù ;
- 4- Skoazellañ da dennañ gounit deus pinvidegezhioù ar girzhier en un doare padus ;
- 5- Mirout hag adc'hounid hirder ar girzhier.

Rann II : Ur reol nemetken evit sterniañ distruj ar girzhier

Ur reol strizh eo, ne zegemer ket an diskleriadurioù.

Pennad 2

A-raok distruj, diskar pe distresañ ur c'harzh e ranker da gentañ kaout aotre prefed an departamant.

Kaout an aotre-se eo ar reolenn nemeti a zo da zoujañ evit pep prosezadur melestradurel stad a denn da ziskar ar girzhier.

Pennad 3

Renerezh-Departamant an Tiriadoù hag ar Mor a zo e-karg da studiañ ar goulennoù kaset da w/Gwicked Nemeti ar Girzhier.

Dastum a ra alioù ar servijoù ha kevredigezhioù a-zere ha kenurzhañ a ra priziadennoù an doserioù.

Evit studiañ mat an doser, e ranko ar servijoù kemer harp war kement titour publik a zo diwar-benn an endro.

Pennad 4

Bep tro ma vez goulennet an aotre da ziskar ur c'harzh e rank da gentañ un aozadur a-zere priziañ ar goulenn e-keñver e efed war an endro. Ar briziadenn a zo paeet gant ar goulenner.

Ma ne respont ket ar velestradurezh ac'hann da 2 viz e talvez ez eo bet nac'het ar goulenn, ha ma vefe spesadoù gwarezet pe ne vefe ket.

Pennad 5

An doser savet evit goulenn an aotre da zistruj a rank :

- 1 – Deskrivañ ar c'harzh ha diskouez e pelec'h emañ ;
- 2 – Kinnig abegoù an distruj ;
- 3 – Displegañ perak n'eo ket bet kemeret divizoù evit Harzañ pe Digreskiñ an distruj (prantad HDK – Harzañ, Digreskiñ, Kempouezañ) ;
- 4 – Displegañ peseurt diarbennoù a vefe kemeret evit kempouezañ.

Rann III : Diarbennoù kempouezañ diazezet war ur gael vroadel

- . kenefeder 1 :1 evit ur c'harzh nevez pe distreset ;
- . kenefeder 2 :1 evit ur c'harzh a ya mat en-dro ;
- . kenefeder 3 :1 betek 5 :1 evit ur c'harzh kozh gant un dalvoudegezh ekologel kreñv ;

An diarbennoù-se ar rank kemer e kont hirder ar girzhier kement hag al ledander (2,5m d'an nebeutañ), war forzh peseurt tachenn e vefe.

Pennad 6

Pa vez roet an aotre da zistruj, goude bezañ studiet ar c'hinnigoù evit Harzañ ha Digreskiñ, e redi ar prefed da gemer diarbennoù evit Kempouezañ. Gwelloc'h eo kemer diarbennoù evit adnaturañ, treuzplantañ (girzhier ha kleuzioù) hag adimplijout dindanadoù ar c'hleuzioù peogwir eo an doareoù nemeto a zo evit klask tizhout un disterig a gempouez. Plantañ, plant deus ar vro dre ret, ne vezo graet nemet ma n'eus diskoulm all ebet.

Pennad 7

Ar c'henefederioù kempouezañ implijet evit divizout penaos adplantañ pe adsevel ar girzhier a zo termenet gant ur skrid-embann deus ar prefeti, goude ma vo roet e ali gant Gwicked Nemeti ar Girzhier.

Ar c'henefederioù-se a zalc'h kont eus :

- 1 – Kalite ekologel ar c'harzh a zo bet skarzhet ;
- 2 – Oad ha stankter ar c'harzh ;
- 3 – Perzhioù mat ar c'harzh evit al labour-douar, an dour hag ar gweledva ;
- 4 – Endro an dachenn ha plas ar c'harzh er gweledva ;
- 5 – Lec'hiadur ha kalite an diarbennoù evit kempouezañ.

Rann IV : Merañ padus ar girzhier

Pennad 8

Evit gwareziñ glad naturel ha sevenadurel an tiriadoù,

Evit gwareziñ koulzioù biologel ar plant, al loened gouez ha perzhioù ekologel ar garzhaouegoù, e vo difennet tailhañ, braeañ, divarrañ pe troc'hañ bep bloaz e-pad ur mare termenet gant ur skrid-embann deus ar prefed, eus ar 1añ a viz meurzh betek ar 15 a viz du.

Ar mare-se a zo termenet goude bezañ bet klevet aozadurioù micherioù al labour-douar, strollegezhioù lec'hel, kevredigezhioù gwareziñ an endro ha perzhidi all Gwicked Nemeti ar Girzhier.

An dekred-se a zo kenurzhiet gant prefed ar Rannvro, pehini a lakao ivez e-pleustr stummadurioù evit deskiñ penaos merañ ar girzhier en un doare padus. Ar stummadurioù-se a vo rediet da embregerezhioù al labour-douar, embregerezhioù an takadoù glas, pourchaserien a ra war-dro ar girzhier, labourerien.ezed-douar hag implijidi ar parrezioù.

Pennad 9

Prefed an departamant a dermen, gant ur skrid-embann, reolennoù lec'hel ha padus evit merañ ar girzhier a zalc'h kont deus perzhioù an tiriad. Ar reolennoù-se a dalvez evit ledander ar c'harzh betek ar geot e-kichen.

Ar reolennoù-se a dermen :

- 1 – Doareoù kempenn ar girzhier (dereat evit ar spesadoù) ;
- 2 – Teknikoù tailhañ (difenn implij ostilhoù ma ne c’heller ket dont war giz war o efedoù, kontrol d’un tailh kempenn simpl : braeër-ribloù, girobraeër, heskenn-dro dic’harzhañ,...) ;
- 3- Mare al labourioù kempenn (etre ar 15 a viz Du hag ar 1añ a viz Meurzh evit ar c’houchadoù gwezek pe brousgwezek) ;
- 4 – Diarbennoù mat evit ar vevliesseurtes (koulzioù labour distank, chom hep labourat war hirder ar c’harzh a-bezh, mirout lec’hioù repu, mirout ar gwez marv,...)
- 5 - Talvoudekaat padus bevdoz ar girzhier.

Rann V : Diarbennoù diwezhañ

Pennad 10

Sturiet e vo gant servijoù ar Stad ur c’homite heuliañ. Ennañ e vo dileuridi ar strollegezhioù, ajañsoù ar Stad, micherioù al labour-douar, ar c’hevredigezhioù gwarez an natur ha dileuridi perc’henned douaroù ha parkeier hag ar strollegezhioù. Bodet e vo ar c’homite-mañ bep bloaz evit bezañ sur e vo lakaet mat e pleustr Gwichek Nemeti ar Girzhier.

Pennad 11

Ar galloudoù melestradurel a-zere a zo e-karg da wiriañ e vefe doujet mat ouzh ar reolennoù embannet en dekred. Bez e c’hellont goulenn e vefe reizhet ar raktres distruj ma vez ret.

Pennad 12

Pep goulenn a rank bezañ gwiriekat gant ar servij e-karg eus Gwichek Nemeti ar Girzhier. Daou viz a zo evit respont d’ar goulenn distruj. Ma ne vez ket respontet e-koulz, ne c’hell ket ar goulenner kregiñ gant al labourioù diskar.

Pennad 13

Ma ne vez ket doujet ouzh ar redioù embannet en dekred-mañ e c’hell ar pennkaoz bezañ kastizet hervez reolennoù kod an endro, ha bezañ kaset dirak al lez kastizel zoken.

Pennad 14

An diarbennoù embannet en dekred-mañ a zo lakaet da dalvezout ar buanañ ar gwellañ.

Pennad 15

Ma ne vez ket doujet ouzh an dekred-mañ, ar c’hevredigezhioù a warez an natur hag an endro, mouezh aotreet ar boudoù-bev, a ziskler bezañ galverien-diwall.

Graet e garzhaoueg an Argoat d’ar 1añ a viz Gouere 2026.